



ASEM (Sant-Brieg)

Kinnig labour embannet d'an / ar mard 12 août 2025

Lec'h : **Sant-Brieg**

Doare post **CDI** H/F

01/09/2025

Deskrivadur ar post-labour

Fellout a ra deoc'h labourat gant bugale ha komz a rit brezhoneg ? Emañ skol Diwan Sant-Brieg o klask 2 ASEM gant ur gevrat Dindan atebegzh velestradurel ar gevredigezh deskadurezh pobl (AEP) e vioc'h. Bez' ho po da skoazellañ ar skipailh pedagogel evit an degemer, ar buheziñ ha yec'hedoniezh ar vugaligoù adal 2/3 bloaz hag ambroug anezho e-pad ar prantadoù tro-skol. Diplomet TGM Bugaligoù (CAP petite enfance).

1) Amzer skol : dindan stur ar renerezh

- Degemer ar vugale hag o zud asambles gant skolaer.ez
- Sikour ar vugale da zont da vezañ emren
- Teurel evezh ouzh surentez ha yec'hedoniezh ar vugale
- Skoazellañ ar skolaer.ez evit prientiñ ha/pe buheziñ an obererezhioù pedagogel
- Staliañ, aozañ an dafar evit ar vugale ha kempenn ar savadurioù
- Evezhiañ ar porzh da vare an ehanoù
- Evezhiañ ar vugale da vare ar c'houk
- Kemer perzh er raktresoù pedagogel

2) Mareoù tro-skol : dindan atebegzh an AEP

- Degemer ar vugale ha buheziñ an diwallerezh etre 7e30 hag 8e20 da vintin (div wech ar sizhun)
- Sterniañ ar vugale a-raok, e-pad ha goude ar pred
- Servijout ar predoù e doujañs d'ar reolennoù yec'hedoniezh
- Doujañ d'ar PAloù
- Kas ar vugale d'ar c'houk
- Degemer ar vugale ha buheziñ an diwallerezh d'abardaez (div wech ar sizhun)

Skol Diwan Sant-Brieg

19 boulouard Carnot

22000 SANT-BRIEG

aep22recrutement@gmail.com

Skiant-prenet ha barregezhioù goulennet

GOUZIEGEZHIOÙ :

- Reiñ an tu d'ar vugale d'en em ziorren adalek 2 vloaz (barregezhioù kefluskerezh, sokioafektivel ha anaoudel)
- Doujañ d'aa reolennoù diazez ar yec'hedoniezh ha surentez
- Reiñ lañs da ziorren ar vugale dre ginnig c'hoarioù ha raktresoù pedagogel gant ar skolaer.ez

BARREGEZH :

- Ambroug ur bugel en e zeskoni bemdeziek
- Sikour ar vugale da vezañ emren
- Teurel evezh ouzh surentez ar vugale

- Lakaat e plas ar reolennoù yec'hedoniezh ha surentez
- Aozañ c'hoarioù hag obererezhioù
- Kempenn ha gwiriañ ar savadurioù hag an dafar evit ar vugale

DOARE DEN :

- Bezañ gouest da selaou
- Bezañ gouest d'ober war-dro bec'hioù etre tud
- Kaout intrudu
- Bezañ strizh en e labour hag aozet mat
- Diskouez kaout : sioulded, didrouzded, pasianted hag emvestroniezh
- Kaout startijenn

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/asem-saint-brieuc-120820251706>